

# *Imbourc'h*

Prezegenn ar Pab  
dirak ar Broadoù Unanet



Niverenn 312

29 C'hwevrer 1996

# Imbourc'h, kelaouenn a studi

Seizhvet bloavezh warn-ugent

Niverenn 312

28 C'hwevrer 1996

1\$1\$1\$1\$1\$1\$1\$1\$1\$1

## TAOLENN

|                                                      |       |
|------------------------------------------------------|-------|
| <u>Kemenn</u>                                        | p.III |
| <u>Notennoù Politikel</u>                            | p.1   |
| <u>Roma ha Kergent ne zlefent ket dilezel</u>        | p.25  |
| <u>Itron Varia Soufanieh, Rouanez an Unaniezh</u>    | p.29  |
| <u>Diannotenn gant ar gelaouenn</u>                  | p.39  |
| <u>Prezegenn ar Pab Yann-Bol II dirak ar Broadoù</u> |       |
| <u>Unanet, lakaet e brezhoneg gant P. Kalvez</u>     | p.41  |

&&&&&&&&&&&&&&&&&

Skodenn-vloaz : 250 lur, da vezañ paeet en un taol pe e div wech : 150 lur e deroù ar bloaz ha 100 lur e miz Gwengolo. K.R. Y. Ollivier, 1 534 25 N, Roazhon, pe chekenn-bank war anv "Keneiled Imbourc'h".

Priz an niverenn-mañ : 35 lur ; e Breizh-Veur hag en Iwerzhon : £ 4.

Embannet e vez "Imbourc'h" a-berzh ar gevredigezh "Keneiled Imbourc'h".

Niverenn-wask : 50 015

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 8 leurgêr ar Marchiz, 56 230 Kistreberzh.

&-&-&-&-&-&-&-&-&





NIEH

مريم وولدت العذراء

ITRON VARIA SOUFANIEH

# ITRON VARIA

## SOUFANIEH

Rouanez an Unaniezh

Un diverrañ  
eus an darvoudoù  
c'hoarvezet e Soufanieh,  
Damask, Siria,  
gant an Tad J.M. Touw,  
Vaals, 1994.

Lakaet e brezhoneg  
gant K.G. ha P.K.

&\$&\$&\$&\$&\$&\$&\$&



Abaoe miz Du 1982 e c'hoarvez darvoudoù diseurt a-grenn, e Soufanieh, ur c'harter eus Kêr-Damask e Bro-Siria. D'an 22 a viz Du 1982, ur vaouez yaou-ank, Mirna Al-Akhras anezhi, nevez-dimezet un nebeut oa gant Nikolaz Nazzour, a oa o pediñ e-kichen he c'hoar-gaer a oa klañv, pa ziveras a-daol-trumm eoul diouzh he daouarn. Gant an eoul-mañ e frotas korf he c'hoar-gaer a voe pareet raktal.

Un nebeut devezhioù war-lerc'h, d'ar 27 a viz Du, eoul a grogas da ziveriñ ivez diouzh un ikonenn, ur skeudennig dister a-walc'h, bihanoc'h un tammig eget ur gartenn-bost. An ikonenn-mañ a zo anezhi skeudenn Itron Varia Kazan (ar gKazanskaïa), skeudenn vrudetañ ar Sav-Heol, o tiskouez ar Werc'hez santel o kinnig he Mab. Divizet e oa bet mirout kuzh an darvoudoù-mañ, nemet e klevas Mirna mouezh ur vaouez o kemenn dezhi : "N'az pezh ket aon. Me a zo ganit. Digor dorioù da di d'an holl, na vo miret ouzh nikun d'am gwelout". Adal ar prantad-se e chomas digor dorioù an ti, hag a-viliadoù e teredas an dud evit pediñ dirak an ikonennig.

Fedoù dreist all a zo bet c'hoarvezet ivez ouzhpenn an diverañ-eoul. Eveljust hag "evel boas" n'eo ket an darvoudoù dreistnatur a zo talvoudus, ar pezh a dalvezont ne lavaran ket. Ar wirionez a vez embannet drezo, setu ar pezh a gont, ha setu ar pezh a venn d'an Aotrou Doue e vefe embannet fraezh, ha n'eo ket hepken debron an traoù "burzhdus".

## A N D A R V O U D O U

Betek bremañ ez eus bet merzet pemp darvoud disheñvel e Soufanieh :

I. An eoul : ar pep talvoudusañ eus arouezennoù Soufanieh.

a. Betek Sul Fask 1990 e tiveras ingal an ikonennig hec'h eoul, hag a-wechoù, fonnus. Tremen mil eil-skeudenn eus an ikonennig o deus diveret eoul ivez, hag a ziver c'hoazh e meur a lec'h er bed. Da skwer e Bro-Irak e-lec'h ma ne baouezas ket ur skeudenn da ziverañ a-hed brezel ar Pleg-Mor.

b. Souezhusoc'h c'hoazh eo e tiverfe eoul diouzh daouarn Mirna, diouzh he dremm ivez a-wechoù (ha diouzh he zreid ur wech zoken !). Hiziv an deiz e talc'h ingal an eoul da ziverañ diouzh he daouarn. Gwechoù all eo diveret an eoul eston-mañ diouzh daouarn tud all : da skwer, en ur manati amerikan a oa aet Mirna d'ober ur gweladenniñ ennañ. Goulenn-et e oa bet outi, gant an Tad Abad, eouliañ ar venec'h. Ne gredas ket-hi ober, dre uvelded a spered. Ha neuze e krogas an eoul da ziveriñ diouzh daouarn an Abad ; setu ma c'hellas eouliañ e venec'h.

ch. Diwar an eouliadurioù-mañ eo deuet ar pare da glañvidi, ha pare ar c'halonoù hag ar speredoù peurvuiñ evit lod brasañ an dud.

d. Dielfennet eo bet an eoul e stalioù apotikerezh meur a vro. Diskouezet eo bet dre an enklaskoù-se e oa an eoul-mañ un eoul olivez peurc'hlan 100%, hag eveljust eo digomprenus a-grenn e tiverfe ken alies ha ken fonnus, keit eus ur baperenn hag eus korf un den.

## II. EM ZISKOUEZIOU AR WERC'HEZ SANTEL

Hervez Mirna eo en em ziskouezet ar Werc'hez Vari pemp gwech e korf ar pevar mizvezh kentañ. Bepred eo bet c'hoarvezet war leurdoenn he zi. Ken spontet eo bet Mirna ar wech kentañ m'he deus tec'het kuit, eviti da vezañ mil laouen evelato.



Ur beleg eus an Iliz c'hresian-katolek, an Tad Elias Zahlaoui, en deus sioulaet he c'halon o kemenn dezhi : "Arabab kaout aon ; den n'en deus aon rak e vamm".

III. Adal miz Here 1983 eo bet goursavet Mirna 33 gwech. Padet o deus an abadennoù-goursav-se etre 8 munutenn hag 1 eurvezh ha kard. Hervez testeni Mirna, eo en em ziskouezet dezhi Jezuz hag ar Werc'hez santel e-doug an abadennoù-se.

IV. Goulloù Jezuz ivez o deus bleuniet ouzh he daouarn, he c'hostez hag he zreid, peder gwech en holl : d'ar gwener 25 a viz Du 1983 evit ar wech kentañ, hag e-doug ar Sizhun Santel er bloavezhioù 1984, 1987 ha 1990. Bep tro e steuzias kuit ar goulloù a-benn un nebeut devezhioù.

V. Un tregontad a gemennadennoù a zo bet diskuliet da vMirna e-doug ar goursavioù hag an emziskouezioù. Displeget e vez enno perak e tegouezh seurt darvoudoù kevrinus.

Klasket 'z eus bet e teufe medisined ha skiantourion e Soufanieh, evit ma c'hellfent gwelout an darvoudoù int o-unan. Setu perak ez eus bet savet kalzig a studiadennoù skiantel, dastumet aketus gant kofesour Mirna, an Tad Malouli. Nepell diouzh ti Mirna emañ o chom ur fiñvskeudenner. A-drugarez dezhañ eo bet filmet an holl zarvoudoù gwitibunan. Lavaromp kentoc'h eo a-drugarez da Ragevezh an Aotrou Doue. An holl studiadennoù hag an holl filmoù a ziskouez anat ne c'hell ket an darvoudoù-mañ bezañ troioù-kamm. Ha padal n'eus ket tu d'o displegañ dre sikour al lezennoù-natur nemetken.

## K E M E N N   S O U F A N I E H

Perak e tiver ken fonnus an eoul e Soufanieh ? Peseurt talvoudegezh tennañ diouzh kement-se ? An eoul a glot gant ar pare ha gant ar Spered Glan. Pere eo avat ar goulioù a zle bezañ pareet gant ar Spered Glan ? Setu ar respont a vez roet er c'hemennadennoù : goulioù dizunvaniezh an Iliz eo a vezo pareet gant ar Spered Glan dre sikour hor strivoù hag hor pedennoù.

Ar c'hemennadennoù a zo evel un astenn d'an darvoudoù. Ster an darvoudoù a vez roet ganto ; diskouez an hent a reont davet pennstur Soufanieh a c'heller diverrañ en ur ger hepken : UNANIEZH.

Lies-doare eo an unaniezh-mañ.

a. Unaniezh an Iliz eo da gentañ. Dreist-holl an unaniezh etre ar gristenion "reizhkred" hag ar gristenion "gatolek". "Unan eo an Iliz rak Unan eo Jezuz". Diwanet eo goulioù Jezuz war gorf Mirna dres bep gwech ma voe lidet en hevelep mare gouelioù Pask ar gristenion "reizhkred" hag ar gristenion "gatolek" (1984, 1987, 1990). An termen a zeu a vo evit ar bloaz 2001.

Ingal e komz ar c'hemennadennoù eus unaniezh an Iliz. Divizout e vefe lidet gouelioù Pask en hevelep sulvezh a zo ar bazenn gentañ ha fetis a vez goulennet e kemennadoù Soufanieh.

b. Gresian-katolek eo liderezh Iliz Mirna, ha gresian-reizhkred eo liderezh Iliz he gwaz Nikolaz. Setu ma rank unaniezh vihan o ziegezh talvezout evit unaniezh vras an Iliz. Ar pezh a vez goulennet ouzh Mirna seveniñ a zo dres ar pezh a c'hourc'hemenn hon Tad santel Yann-Baol : ober eus pep tiegezh un Ilizig : pep familh a zo ur maenig a ya da sevel frammad nevez an Iliz. Ar Werc'hez Vari a bouez war dalvoudegezh sakr buhez ar priedoù ha pedenn an tiegezhioù.



ch. Mont e kej gant ar vMuzulmiz. Niverus eo ar vuzulmiz a zeu e Soufanieh da bediñ a-unan gant ar gristenion reizhkred hag ar gristenion gatolek. Dor ar feiz eo ar Werc'hez Santel amañ, a gas anezho davet Jezuz. Ha kalzig anezho o deus treuzet an nor-mañ e Soufaniezh, petra bennak ma c'hell bezañ arvarus kantreiñ d'ar gristeniezh en ur vro islamek.

En o c'hemennadennoù diwezhañ o deus lavaret Jezuz hag ar Werc'hez Vari da vMirna ne welfe ha ne glevfe anezho en-dro nemet pa vezo lidet Pask en hevelep sulvezh gant holl gristenion an Douar : pe er bloaz 2001 pe a-raok ma teu a-benn an dud a Iliz d'en em glevout kent ar bloaz-se. Derc'hel a ra evelato an eoul da ziverañ diouzh daouarn Mirna "evit peurglod va Mab Jezuz, pa fell dezhañ".

## A - B E R Z H   D O U E   ?

N'eo ket peogwir eo dreistnatur an darvoudoù drezo o-unan e c'hellont bezañ gwiriekat. Gwiriegezh ar fedoù dreistnatur a vez diazezet da gentañ war dalvoudegezh ar wirionez a vez tostaet outi drezo. Ha diouzh ar savboent-mañ e ranker anzav eo pinvidik-mor talvoudegezh ha ster darvoudoù Soufanieh. Talvoudusoc'h ar mennadoù eget ar burzhudoù zoken ! Kement a startijenn a vez roet amañ d'ar feiz ma vefe tu da lavarout kement-mañ zoken mar ne vefe ket dreistnatur an darvoudoù-se : kalz a briz en dije evelato kemenn Soufanieh. Soufanieh hol lak da dostaat muioc'h ouzh Jezuz hag e Aviel, ha setu ar pezh a gont. An dud a zo e penn an Iliz eo a zo kiriek war an dachenn-mañ avat, hag int nemeto a c'hello barn da vat.

## R E N E R I E N   A N   I L I Z

Ezel eo gwaz Mirna ouzh an Iliz c'hresian-reizh-

kred, ha dre-se eo an Iliz-mañ he deus da zivizout, da gentañ, war darvoudoù Soufanieh. Ur miz hepken da heul deroù an darvoudoù, e dibenn miz Kerzu 1982, penneskob an Iliz-mañ en deus embannet e oa "burzhudus" an ikonennig, ha lakaet e voe da vezañ lidambrouget betek an iliz-parrez. Adalek ar prantad-se avat en deus paouezet an eoul da ziverañ ; ha n'eo nemet p'eo bet degaset da vMirna en-dro, (dre guzh, en ur sac'h plastek), eo bet krog an eoul da ziverañ diouti en-dro. Chifet eo bet an tamm anezho gant se renerien an Iliz c'hresian-reizhkred, ha dilezet o deus Mirna hag he ikonennig. Mut e chomont betek bremañ war an afer.

Stag eo an Iliz-se ouzh hini Konstantinopolis. Un Iliz arall ez eus evelato e Bro-Siria : an Iliz siriek-reizhkred ; kalz koshoc'h ez eo, rak en emzispartiet he deus abretoc'h kalz : er pempvet kantved. Zakka I-añ Iwas, rener an Eil Iliz-se, en deus sinet ur feuremglev gant hon Tad Santel ar Pab Yann-Baol, o tiskleriañ ne oa ket a ziforc'h diazez etre an Iliz siriek-reizhkred hag an Iliz katolek evit ar pezh a sell ouzh ar feiz, nemet traoù dister e vefe. Hag a-du a-grenn e sav ar penneskob Zakka I-añ Iwas gant talvoudegezh darvoudoù Soufanieh. Henn diskleriet en deus dirak an holl.

Betek-henn, an Iliz katolek a zo chomet dilavar evit chom hep feukañ an Iliz c'hresian-reizhkred. Un toullad eskibion gatolek evelato o deus diskleriet ez-prevez e savont a-du gant talvoudegezh ikonennig Soufanieh, ha dont a reont zoken da bediñ dirazi. Kannad Iliz Roma e Damask a zo a-du krenn ivez ; e darempred emañ gant Mirna, hag e ro keleier ingal d'ar Vatikan.

Ur c'hendalc'h teologel a zo bet dalc'het dija a-zivout Soufanieh, er bloaz 1991, e Kêr-vMunster ; an aotrou kelenner Vorgrimler a zo bet gwelet eno, hag ivez an aotrou Laurentin ha teologourien all. Studiet eo bet eno ar c'hemennadennoù, hag



an holl o deus diskleriet e oa ar re-mañ a-liv penn-da-benn gant an Aviel. "Uhel-meurbet ha dibaot eo talvoudegezh speredel darvoudoù Soufanieh" o deus diskleriet zoken un toulladig teologourion veur.

## U N A N I E Z H

"Gloazet eo ma c'halon" he deus lavaret ar Werc'hez Vari e Soufanieh. "Na lezit ket ma c'halon da vezañ frailhet en abeg d'ho torr-emglevioù". Pa sav tabut etre ar vugale, petra 'rank ober o mamm ? Kement-mañ hol lak da santout gant pebezh damant e vez taget kalon hor mamm. E pep lec'h er mare-mañ e seblant sevel an dud an eil a-enep d'egile. An dizemglev eo a vez o ren an traoù dre ar bed, o treiñ da enebadurioù ha brezelioù. E dondonañ ar c'halonoù e teu ar reveulzi-se eus unan a zo an torrer-emglev kentañ : an diaoul, (diabolos, an hini a dorr). Hag o vodañ he holl vugale e vez bremañ hor mamm. War dachenn an lliz hag an tiegezh e pleustr darvoudoù Soufanieh. Ha padal eo divent mennad an unaniezh, hag he seveniñ hon eus d'ober war gement tachenn a zo.

Pal an unaniezh a zo ger-stur ar Werc'hez Santel e Soufanieh evel m'hel lavaras hec'h-unan er bloaz 1985 : "Tridal a ra ma c'halon e Doue, p'ho kwelan bodet-holl gwitibunan evit pediñ hag embann ho feiz. Ma c'halon din-me a vez o tridal pa vez unanet-holl ho re".

Bezomp unan diwar neuze er gengarantez evit ma trido kalon hor mamm gant al levenez.

Bezomp unan holl bremañ du-mañ, evit ma vo hor bro merc'hig he mamm en-dro.

\*\*\*\*\*

Sed amañ teir fedenn bet diskuliet e-kerzh  
an emziskouezioù.

I. (E Damask, 21 C'hwevrer 1983)

"Doue ma salv,  
Jezuz a bar warnon.  
Ar Spered Santel a zo ma buhez :  
Setu perak e vezan dizaon a-grenn".

II. (E Damask, 31 Mae 1984)

"Jezuz muiañ-karet,  
az teurvez e vanjen en da galon  
Dreist da gement tra 'zo,  
Dreist da bep krouadur,  
Dreist d'an holl Aeled,  
Dreist da bep gourc'hemenn,  
Dreist da bep levenez ha da bep barr-levenez,  
Dreist da bep gloar hag enor,  
Dreist da holl lu an Neñv ;  
Rak te an hini nemetañ a zo an uhel-meurhet,  
Te an hini nemetañ a zo galloudus  
ha karantezus dreist pep tra.  
Deus davedon d'am frealziñ,  
Da derriñ ma ereoù,  
Hag am c'has d'ar frankiz,  
Rak hepdout e vez divlaz ma levenez,  
Rak hepdout e vez goullo ma zi.  
Ha neuze e teuin da gemenn :  
Sed ma 'z on deuet rak ma fediñ ac'h eus graet".

III. (Maad/Lebanon, 22 Gouere 1987)

"O, Tad, hor salv,  
Az teurvez hor salviñ,  
Dre berzh goulloù da Vab muiañ-karet".